

B U E Z
SANT EFFLAM,

PRINÇ A HIBERNI,
HA PATRON PLESTIN;

Buez Santez HENORI e Bried.



E MONTROULEZ,
E ti LÉDAN, Imprimer Otrou
Escop Qemper, e traon Ru ar Vur.

1819.





B U E Z AN OTROU SANT EFFLAM, PATRON PLESTIN.

Var ton Guerez Sant JULIAN,

SELAOUIT oll a vir galon
Buez Sant EFFLAM, hor Patron ;
Eur Vuez gaér hac admirabl,
Da hout eu Plestin desirabl.

Desirabl ve, me a grete,
He gout partout dre ar c'hontre,
Evit alumie er galon
Da Zant EFFLAM devocation.

Pepini sur a seziro,
Goude clêvet e viraclou,
Renta servich bemae dezân
Qeit ha ma vezoo er bed mân.

Commanc'omp qenta lavaret
E voa brezellan diremet
En Hiberni hac en Bro-Zos ;
Ne voa tuy na peoc'h na repos.

Qer sclesset voa o c'halonou,
Ma seljont oll ous an énvou
Da c'houlen pardon ous Doue ;

Misericord ha trugare.

Hor Zalver, leun a gagante,

A zellas oute a drue,

O rey Dofin d'an Hiberni,

Ech' eure d'ar brezel cessi.

Fatiguet voa ar Rouane,

Ma sinjont at peoc'h entreze

Da rey d'o sobl paciantet,

Pa voast ganter Doue aspares.

Evit brassoc'h fidelite,

E concluas jar Rouane

Vat ar sujet da zemerzi

Ar Prinç EFFLAM da HENORI.

Cetu quic'h jan oll armou,

Cetu cesser at breszellou,

Cetu partout ar peuc'h sinet,

Eus a bell amzer desizet.

Ar Prinç EFFLAM neve ganet

A voe bep war qen instruct,

Ma surpasser en vertuziou

Cos ha ymouanq an oll er vro.

Rey a garie aluzennou,

Ober orezon ha ymou;

Evelse en em dispose

Da renta servich' da Zoue.

Credit evit tra assuré

Ech'inistre e oll Brincet

Dre'r vertuziou a bratiqe,

O caret zervicha Doue.

Un deiz oute e conferas;

Hac o avis a c'houennas;

Da guittâr vanile ar bed;

Da ze voa en em resolvet;

Gant abondanç eus a zactou;

E rentjont da Zoue grâcou;

O prometi d'o mestre ec'h ajo;

E voa qément a zesirent;

EFFLAM e zaouarn a juntras;

Ha da Zoue grâç a reatas;

Da veza gantan inspinep et eus;

Da zortjal demeus ar bedi;

Sonjal a rejont er voyen;

En pe fêçon ar môt tremen;

Mes dre bermision Doue

Voe retardet o bolonte.

Ar Roue e Vab a c'halvas;

Hac e avis a c'houennas;

Evit consanti eureuji

Ar Brinçes yaouanq HENRI;

Evit ne voa e volonté;

E consantas dre c'hraç Doue,

Evit d'e dad oboissa,

Ha miret ous anngi dezâ.

Prest e voe grêt an depechou;

Gant rejouissanç ha pompou,

Gant dilijanç d'o eureuji,

Gant ur joa vrás en Hibernie.

Et memes deiz êru an nos,

E voejont casset da repos,

Hac e lavaras d'e bried

Ar pez a voa en e speret.

HENORI e veza clévet

Ar proposiou eus he fried,

D'en em estoni he ieugas,

Ha da veza contristet bras.

Én gant an aon na gontsanje

Miret eveltan't chastete,

En devoe prest qeuz d'e gomzou;

Hac e sonjas quiât ar vro.

Evel ma lie santas cousset,

En em rentas gant e Brincet

En ur barq fichez da vonet

D'ar plaç ma vijent inspiret.

Cunduet e voent gant Doué,

Ha rentes prest en ur c'bontre,

En bent bras e peno al Léo-Drèz

A Lannion da Vontroulez.

Pa voant eno en em rentet,

Ha tost d'ar forest disqennet,

Dirac ur roe'h hanvet Qerlas,

Ul loën horrubl a dremenras.

Guelet a rejont un dragon

Ous em denn en un toul don,

Da ur c'bavarn var dro mil pas -

Dious al lavaret roc'h Qerlas.

Nao iliñad eus a zonder,

Hac a lee'hed daouzez antier

En d'oa ar c'havarn ma loje,
Ervez ar scrit eus ar Vue.

Gant zon ma vije attaquet
Goude ma vije antreet,
Gant finesse , evel al lern ,
E yê a recul er c'havern.

Er bla pêvar c'chant anter cant ;
Artur , courajus ha vaillant ,
En em blije da chasseal
Ar serpentet ha monstreul al.

En abondanç e voant dre'r vre
Er c'boajou hac er forestjou ;
Ha desolet voa ar c'hontie
Gant un nombr bras a loëned goc ;
Pa dremene EFFLAM an Trèz ,
Heuillet gant e gompagnuez ,
Ar Roue Artur a rancontras ,
Asister gant Otrone bras.

Pa voe saludet gant EFFLAM ;
Hac hanvet dezàn tad' ha mat ,
E tisclêrias c'hoas ar sujet
Da veza en Breiz disqennet .
Artur souden a ziñqenpas ,
Divar vatch' , bac ex yxiatas
Gant calz eus a rejoñissanc ,
Dre ma voant a un aliang .
Pourmen a rejont spas amzer ;
Gant discoursiou guel famillier ,
O comz demeur o aliang ,

Gant plijadur ha confianç.

Pa voant dirac toul ar serpant,
 E lavaras Artur d'ar Zant:
 " Estonet bras en em gavàn
 " Rac ma credit bale amàn.
 " Hac e credit, eme'r Roue;
 " Chom quer tost d'ar monstr cruel'ze,
 " Hep more'bet ha gant assuranç!
 " N'er græn quer hep asistanç.
 " EFFLAM dezàn a respondas:
 " Béza hon eus un Doue bras,
 " Un Doue bras hac hor miro
 " A bep perill ha danjeriou.
 " Guelet hon eus ous ur forest
 " Ur monstr o sortial, ha prest
 " D'e gavern eo en em dennet,
 " Hac a recul eo antreet."

A bel amzer en devoa c'hoant
 Artur da gaout toul ar serpant,
 Ma pedas EFFLAM da zisque
 Ar c'havarn ma en em rente.

Pedi ras ar Roue Artur
 Da guemeret ar blijadur
 Mar pliche gantao ur pennad
 Da velet r  y d'at monstr combat.
 Neuze soudou e comman  as
 Ar Roue gant ur gourach vras,
 Dre ma voa ha cr  n ha puissant,
 Da r  y attaqou d'ar serpent.

Un deiz antier a implias
 O combat, hep ma paouezas ;
 Qer fatig voa o combati,
 A ben ar fin ne aille mui.

Da guichen EFFLAM e tosiâs,
 Ha var ar yêod en em dolas ,
 Gant qement demeus a zec'het ,
 Monet pelloch n'e alle qet.

Sant EFFLAM, gant truez outâ ,
 Pa na gave dour da eva ,
 A bedas Doue evelen ,
 Hac exocet voe e beden.

„ Otrou , pehini a netra
 „ Oc'h eus crôuet oll ar bed-mâ ,
 „ Me o supli hor zoulajit ,
 „ Hac hor pedennou exocit .

„ Pèp tra oll deoc'h a obois ,
 „ Evel ma tisq deomp ar feiz ;
 „ Dour en desert o poa roet
 „ Da Voyses ouz e zec'het .

„ Plijet ganeoc'h ive , Otrou ,
 „ Dre ho Passion , ho meritou ,
 „ Ho Mab uniq hac hor Zalver ,
 „ Rêy bremâ dour d'o servicher .

Goude éch eure Sin ar Groas ,
 Ha prest var ar roc'h e scoas
 Da ben reir guech gant e vourdon ,
 Goude beza grêt orêzon .

Eur bouill dour sclêr a zortias ,

A rē gēude miraclou bras

D'ar belerinet a deue

Gant devocion d'ar plaç-se,

Sourcen an dour a velor c'hoas

En Toul-Efflam var an hent-bras,

Ebars en antre al Léo-Drèz,

A zeo en distro Moutoulez.

Pa velas Artur ar mirack

E scoas var e estomac;

D'an daoulin prest en ema dolas,

E asistanç a c'houlenoas.

„ Hor zicourit ouz ar serpent,

„ Ni o supli, c'houi, Princ vaillant;

„ Ni a vel sclér oc'h eus galloud

„ Hac a ya bremâ en hon iout. „

EFFLAM en devoa a galon

D'e asista istaucion,

Hac a bromelias er raje,

Gant ar c'hraç demeus a Zoue.

Tremen a eure oll an nos

Ep monet-camet da repos,

Epad an nos en orézon,

Evit guir preparacion.

Pa voa deut antionos mintis;

En eur stouas yar e zpoulin,

Prest dirac cavarlu an dragon

Ec'h eure c'hoas e orézon,

Neuze d'ar serpant ec'h ordren

Sorial prest eus e gayem,

Hac e sentas ous e gomzou,
Dre c'hraç Doue ar guer Otrou.

Neuze ec'h euse orêzon,

Hac e lavaras a galon

Ar c'homzou varlerc'h rapoitet;

Selaouit-he hac ententet.

„ Jesus, bon Roue eternel,

„ C'houi lavaras doc'h &bestel

„ Extermina en oc'h hano

„ Ar serpantet hac ar monstrou.

„ Plijet ganeoc'h ivé clêvet

„ Hon reqejou deoc'h adresset;

„ Plijet ganeoc'h deomp otrei

„ Bea delivret dious annui.

„ Mirêt dious droug tud ar c'hanton

„ A recevont dious an dragon,

„ Evit gallout ho servicha.

„ Qêita ma vefomp ei bed-mâ.

„ C'houi zo gant ho Tad eternel,

„ C'houi zo gant ho Speret-Daniel

„ O veva, o rën assambles

„ Evit ur bîviquen james „ Amen.

Pa voe achu e orêzon.

E pign var ur roc'h an dragon,

Hac e sellas a bep coste,

Pa voe pignet var ar goute.

Hac én da c'hrigonch. da yudal,

Un dra horrubl eo e zonjal;

Qer crén, qen terrubl e crias,

Ma voe clêvet eus a bel bras.

Gaude ze e benn a stôras,
Goad en abondanç a rentas;
Neuze en Trèz e tisqennas,
E yas er mîl, en em veuzas.

Ar Roue Artur pa velas
E rô EFFLAM miraclou bras,
A rentas prest an ol graçou
A voa possabl d'e veritou.

Neuze d'ar guêr e tistroas
Gant contumant ha joa vras,
O velet sia eus an diagon,
En devoa noazet er c'hanton.

Eno e tremenas an nos
EFFLAM gant neubeut a repos,
Hac antronos, qent ma flachas,
E ofic c'hoas a lavaras.

Goude ze e yas da bourmen
Var goste an od pen-dab-en,
Da choas ut plaç a dost d'an Trèz,
Dezàn ha d'e gompagnunez.

Etal eur voz en em gavjont,
Bete he zourcen le hejont,
Ma voa ut plaç qement d'o grat,
Né deurvejont qet e guittât.

Eno e teurvejont sevel
O Hermitach hac ut Chapel
Da zervicha Doue bemde,
Assambles enpad o bue.

Antroncôs goude o feden
 Ec'h ejont are da bournem.
 Hac int caout eur bouill dour eva,
 Evit en êm rafé echissa.

Eva a rejont anezi
 Peb a vanne mad pepini,
 Hac an dour-ze o zoulajas,
 Ha rafrechisset o rentas.

D'o hermitac h' e tistrojont,
 Ha lein preparet a gavjont,
 Un El en qichen azeet
 Var ar yêod glas a dost d'o boüed.

Qer brillant voa sclérijennet,
 Sellet outan ne aillent qet;
 Ne aillent qet tosiât outâ,
 Qement' râ c sclérijenna.

Neuze dezo e lavaras:
 „ Tostait, tud a istim vrás,
 „ Da zebri bardiment ar boüed
 „ A velit amân deoc'h fichez
 „ Eul lein a zo deoc'h preparet
 „ Gant hor maguer, Crouter ar bed,
 „ Pa oc'h en êm rentet dezâz,
 „ Ha dilezet oll ar bed mân.
 „ Me a zo deut d'o servicha,
 „ Hac a zo digasset gantâ
 „ J'o consoli bac tro Princet,
 „ Bars en exil oc'h eus choaset.
 Goude prest e uisparissas,

Hac en jóa vras eo o lezas;

En ur joa vras spirituel

Annoncer dezo gant an Ael.

Goude beza ientet grāçou

Da Zoue eus e faveuriou,

EFFLAM an dol a viniguas;

Hac e qemerjont o repas.

Goude o fred en em élēvjont,

Ha da yun en em avisjont:

D'al lun, d'ar merc'her, d'ar guenier,

A yièn enpad o amzer.

Neuze Doue a gonfirmas

O desseign gant miraclou bras,

O rēy an deiziou ze dese

Da zebri digant an æle

Ar grāçou hac ar faveuriou

A recevent eus an ênvou,

O laqas neuze da zonjal

Ne dleyent qet clasq ur plaç-al.

Credi a rejont an draze

E voa agreabl da Zoue

E chomjont er plaç-sé ato

D'e zervich bete ar mao.

Oza a rejont ar Chapel

A voa eno abaoue pel,

Achui o c'habinejou.

A bep tu desi tuo var dro.

Chom a rejont neuze eno;

Quanui o fedegnou,

Ha

Ha monet d'ar Chapel bemde,
D'an ofic enpad o bue.

Bep sul, bep meurs ive bep yaou
Ha bep sadorn sur bep nep gaou,
Ecavent o boued preparet
Giêt gant an El er gabinet.

Pa voant eno en santelez,
EFFLAM hac e gompagnuez,
Gant an oll a dosi bac à bel
Voant admirer en Breiz-Izel.

Cetu un hermit éruct
En devoa eno habitt,
Un Hermit hanvet Sant Gestin,
En eus ur Chapel en Plesstin.

Gestin dious Rom pa zistroas,
D'e blaç are a retornaç,
Evit qemeret e repos
Ha tremen ennâñ deiz bâ nos.

Mes Sant EFFLAM a voâ ennâñ,
Ma lavaras Gestin dezâb :
,, Va breur qêr, deut mad râveet,
,, Va flaç so deoc'h, ne flachit qêt,

,, Evit beza ar plaç indign,
,, D'o possedi gant ocb oll dicin,
,, Habiteù-an bele mîrvel,
,, O c'hostos ar gloar éteirek.

EFFLAM érmës a zortias.
Ha da Gestin a réspontas :
,, Tad venerabl just ve lezab

» Ho ti ganeoc'h ; c'houi deu a bal.
» Me zo cièm, dispoz ha yaouanq.

» Hac a rëy prest eur vatimant ;
» C'houi zo fatiguet gant an heur,
» Chomit amàn , me ya em hent. »
Gestin dezau a respondas :

» Va escusit , n'e dec'hit pas ;

» Eut plac all me a bourveos

» Chomit gnoc'h exercicou . »

Ha pa voant o daou en divis

Piou a dec'hje dre honestis ,

Un Æl dezo a barissas ,

Hac evellen a lavaras :

Goude beza grët ar zalud ,

E voa agreabl o disput ,

E voa agreabl da Zoue ,

Ceto amàn e volonté .

» Oidrejet en deveus Doue

» Ma chomq EFFLAM er plac-se ;

» Ha Gestin en em retiro ,

» D'at fôret nessa zo vardro . »

Pa voa dispartiet an Æl

E renjont græc d'an Eternel ,

Da verz dezo disclêiyet

Ar pez a voa en o souhet .

Géstin a guemeras coaje

Digant Sant EFFLAM en heur-ze ,

D'at fôret tost en em rentas ,

Hac en sanctiez a vevaz .

Hor Zant EPLAM a dremnas
 Ar rest e amzer en e blaç,
 Qen a voe galvet gant Doué,
 Dre eur c'hlénvet bian goude.

Var e varo ec'h exhortas
 E Zisqibien, hac a zentas,
 Da bemeveri er plaç-se,
 Qen a vije fin d'o bué.

En e Chapel voé entéret
 Gant e vreudeur asistantet,
 Ar c'houec'hvet deiz eus a vis Du,
 Tud en em rente a bep tu.

Qement a voe a vitaclou,
 Ma teue tud eus a bep bro;
 Ma voe sonjet eno sevel
 En enor d'ar Zant ur Chapel.

C'hoaryout a cure bep douetang,
 Dre bir amzer ha neglijang,
 Ma voe neglijet ar plaç-se,
 Hep nep mancion er c'bonstre.

Goude e revelas Doué
 Ar zanielez eus ar plaç-se
 D'un den zantel voa er c'bonstre,
 A dost djar Chapel e chome.

Né voa qeñ assur an dea-ze,
 Ervez ma lenner er Vue,
 E vije eno habitet,
 Nac e vije bet entéret.

Bep sadorn-e voa custumat

Da scuba, guech ne vanqe det;
 Ha pa scubas ut certen de,
 E teuas goad eus ar pave
 Estonet bras deineus a ze,
 E laqas evez mad goûde,
 Hac e vele canticui;
 Ia ha mèmès e cresqi.

Sonjal eure neuze confer
 Gant Pol, Escop eus a Dreguer;
 Ha pa voe dezàn disclêtyet,
 E conféras var ar sujet.

Confer eure gant ar Chabistr
 A ur sujet a voa quer trist;
 Bet avis ar re savanta
 Dre'o Escopi var guement-mâ.

Dre o avis en em rentas
 En Pléstio, hac e publias
 Ober tri yun hac orézon,
 Gant calz eus a zevacion.

Goude-zé e courc'hemenhas
 Ma vije toulet prim ar plaç
 A beini e sortie
 Ar goad eno a remerqe.

Cavez voe heuze er poull zo
 Corf Sant EFFLAM hac e Vué
 En e archet gant e hanô,
 Cetu bepret ar miraclou.

Gant calz a enor ba respect
 Demeus ar poull e voe savet,

[f. 17] Ha douguet d'an Ilis Paros,
E goft zo eno o repos.

En Plestin er Be goureet,
Gant dreizhou ouaru goloet,
Emedi Coif hor Zant Patron,
Rentomp dezàn devotion.

Gîet zo eno miraclou bras,
Hac a gantinu bepret c'hoas,
Dre e faveur ha meritou;
Rentomp oll da Zoue grâcœu.

Rentomp dezàn iwe servich,
Me ho supli oll, Plestinis,
Ma veritimp e assistanç,
Hac éructap en e bresanç.

E c'haloud zo bremz qer bras
Ha ma eo bet James biscoas;
Nep gant fianç et goulenno,
Me oc'h assur en o c'hlêvo.

Guelit ze dre experianç,
En andret calz e assistanç,
A dost a bell'en eus clévet
Ar beden dezàn adtesset.

Ne lezompa nep déiz da drême
Na réyo pepini peden
Gant fianç hac a vir galon,
Clévet vero hon crêson.

Assuret én hor c'hundao
Fidelamant en hoa œuvrou
Ma veritomp oll, qent mervel,

B U E Z

S A N T E Z H E N O R I ,

PRIED DA ZANT EEFELAM ,

Pekini he deus ur Chapel e Paros Blestine .

Var ar intedies ton .

SELAOU ha compren a galon,
Disq., mat>ao'h eas devocion,
Ur G'hanliq zo never formet,
Da HENORI ha, d'e Fried.

En amzer ar Pab Sant Leon,
Tad-sori an Ostroa. Sant EFRUAD,
En devoa brevet ha combat po en
Cuntinuel bete ar gead,
Qement a voa a vassacrou,
Qement demeus a valouriou
En Bro-Zoz hac en Hibernie,
Ne vouiet en ope du trei.

E zezir voa, cointinui
Ouz, ar Roque Tad. HENORI,
Cuntinui bete'r maro,
Ha conservi bepreec e gro.

Succedi cure d'ar gurun,
Succedi ive d'ar fortun,
Tad Sant EEFELAM, ar Princ vaillant,

Neuze souden incontinant.

Tad Saint EFFLAM n'em rezolvet
Da heuillvar gombat comancet,
A resistas gant vaillantis
Hac eur gourack a voa esqis.

Difficil ve consideri
Ar maleuriou hac an annui
A voa en diou Rduantelez
Gant calz eas a dfistidiguez.

Ar bobl a voa qen affijet;
Ma voa o c'halonou sclacet;
N'o devoa peoc'h na nos na de,
Nemet bepret adversite.

Pa deu dezo dont da zonjal
En o hitvoud var an douar,
E c'houlenjont peoc'h ouz Doue
Ha remet dio adversite.
Exocet voza fedcunou
Gant hor C'hrouer hac bon Otron,
O r y d'ag Roue ur buguel
Hac a vaguas peoc'h er c'bartier.

Rac ar Roue voa fatiguer
Gant ar brezelou diremet,
A zinas ar peoc'h entrez,
Da r y d'ar bobl o libert .

Hac fvit temel an discord
Ha ma vije ferm an accord,
E voe concluet deme i
Ar prin  EFLAM da HENOL.

Cetu rejouissanc er vro
 Da guitat prest an oll armou;
 Cetu dezo paciantet
 Dre c'hraç Doue, Crouer ar bed.

Pa voe ar Princ EFFLAM en oad,
 E c'hoantas ar Roue e dad
 Qemen ar Brinces HENORE,
 Ma feuas prest ca Hibenni.

Pa voa eno en em sentet
 E yas ar Roue da glêvet
 Avis e vab var ar sujet
 A voa entreze tremenet.

Mes Sant EFFLAM deliberet
 Da zoital demeus ar bed
 Evit ea em rey da Zout
 A voe souezet var an trete.

Mes pa deu da gônsideri,
 E eavas rônion consanti,
 Evit d'e dad oboissa,
 Ha miret oas annui dezâ.

Prest e voe grët an dépechou
 Gant rejouissanc ha pom pou,
 D'o assambli, d'o eureuji,
 Gant ur joa vras en Hibenni.

Pa voe tremenet an deiz-seq
 E voent çanduet d'o goelez
 Ma conferas oua e bried
 Ar Princ e zesseign qemeret.
 Ar Princ pa he zantes coustet,

En em rentas er baſq ficheſ,
 Gañt e drein evit monet
 D'ar plaç ma vijent inspriet.

Pa deu d'ar Brinces difuni,
 Ha n'e gav mui EFFLAM tost dei,
 He comanças da gontrista
 Gant glat'bar rac dispartia.

„ Birviqen n'em be nep repos,
 „ Na nt'cessio na deiz noz nos,
 „ Qen a vezin en em Tentet
 „ Gant ar Princ EFFLAM, va'ried.
 Evel ma red dour éri goaziou,
 E ro he daoulagad daerou,
 Ous en em velet dilezet
 Gant he brassa fianç er bed.

Ar Rose hac ar Rouanez,
 Leun demeus a dristiñiguez,
 O devoa qement a c'hlac'bar,
 Ma rentent cañon a voa impar.

Regrejet voa gant ar Princet,
 Regretet gant ar Brinceset,
 Regretet gant an oll noblanc ;
 O vera collet e bresanc.

Regrejet voa gant an Ilis,
 Regretet gant ar c'hontreis ;
 Ur regret bras a voa dre'r vro,
 O vera quitet o Otrou.

Henori outi a lavare
 „ Beva' rajemp en purete ;

" Ar per ho poa dia proposet,
" Em boa en instant copsisantet.

Neuze soudēn bi deguiset,
Gant aon na vije ampechet,
Ec'h eure prest he dilijang
Da tēy effet d'e esperanc.

Incontingant en em laeras,
Mac er vag-se en em rentas,
Hep ma vœc sauter o. vonet,
Elec'h ma vije inspiret.

HENORI, pedi tec'h Doue
D'o cuñdui d'e volonte.
Hac e voejoc'h prest exocet
Ha cunduet en ho souet.

Pa vœc'h var ar mōr ambarqet,
Ha rente! en od ar Yeodet,
E tisqenjoch var an douar,
Evit mones da glasq bo par.

Caout a rejoch ur pesqeter
E sortial eus ar rivièr,
A zisquesas dec'h ar c'banton
Ma chome EFFLAM, ho mignon.

Ha pa ejoc'h a bas a pss,
Eur c'havallier prim oc'h heuillias,
O sonjal dont doc'h off'nci,
Mes n'en devoe qet a velli.

Heuilliet voejoc'h bete ar plas
Ma chome ar Prinç-a glasqac'h
Gant ar mechant evit drouc han,

Hac a velas e fot erfùn.

**Ha pa velas an den mechans
E voa rentet én impotant,
E c'houlennas oc'h asistañç
Da gavet pardon d'e effanc.**

„ **EFFLAM, EFFLAM, deut ma lemstet
Va dorn et men a so manet,
O heuïk HENORI, ho Pried :
Cout a rau bremàn va fec'het.
Gouide ma voant n'em zaludet
Ha clévet gante e reget,
Ec'h eure EFFLAM orëzon
Evit obien dezàn pardon.**

**HENORI goade n'em retiret
D'ar plaç ma eo bremàn pedet,
A yé alies da gavet
Avis Sant EFFLAM he Fried.**

**Rac ma vevent en sautelez,
E tigasse Jesus Alez
D'o c'honsoli, d'o c'bundai,
Ha da réy dezo da zebri.**

**Santez HENORI, buguel Doue,
Pa oc'h maguet gant an Alez,
Dre c'htaç Doue ho cuit Grouer,
Clévit ouzomp, pa ho peder,**

**Dreizoc'h e suppliompr Doue
Da zoulèji e vugale :
Roit lèz d'ar vaguerezet
Da yezur o inoçantet**

Clêvit-u c'hoas, ni o suppli,
 Qement a deuyo d'o pedi,
 D'o restitui en yec'hed
 Pa vint gant terzien affijet.

HENORI gant Jesus caret,
 Pedit-bi hac e voc'h clêvet;
 Pédit-bi eus a vouir galon
 D'o miret oûs tentacion.

HENORI, scüer ar prièdou,
 Hor c'bunduit en hon œuvrou,
 Ma vefomp evit gloar Doue
 Ha silvidiguez hon ene.


Pa oc'h gant Doue conduet
 Da beuill Sant EFFLAM bo pried;
 Hor c'bunduit en hon œuvrou,
 Ha preservit dious maleurou.

Cerien ennoch hon eus fianç;
 Hac ive calz a esperanç;
 En clénver, én nécessite,
 Hon recomardit da Zone.

Pa voe ar c'hlénver er c'banton,
 E virjoc'h dious contajion
 Otrou Leroimel hac e Iiron,
 Balamour d'o zevoeion.

O devocation voe sevel
 Da Zantes HENORI ur Chapel
 A voa chomet a bel-amzer
 Hep rep:darempret er c'bartier.
 Soulajit an dud a bep clényet

A deuy gant fianç d'o quelet ;
 Obtenit deo oll ar yec'hed
 Digant Jesus, Salver ar bed. *Amen.*



MISSION PLESTIN.

AR 27 a viz Even 1819, ez eo bet digoret ar Mission en Plestin, gant an Tadou Missionerien eus ar vio.

Ar Guener, 9 a viz Gouere, ez eus bet plantet ur Groas caer e penn ar hobi, er memes plaç ma voa goechal ar Groas ven, vis-a-vis da Gouent ar Seurezet Polinezet.

Ar Ceremoni-ze eus ar Groas a voe, eus an touchanta : uguent den yaouanq, guisquet en dû, a zorgue ar Groas, gant ur pas douç hac ur vodesti an humpla ; ha pêvar Bêleg, en o obou, a heuille pas ha pas, hac a zongue var ur brancart imach hòr Zelver adorabl, pebini aiuet er plaç destinet, a voe staguet ous ar Groas-se, e presanç ur bobl immañç, pebini, dre e hirvoudou hac e zaerou, a rente d'ar Relijion ha d'e Zoue an tribut leal eus e anaouudeguez.

Un deiz demeus an eil zizun eus ar

Mission, e rejot ur ceremoni meurbet touchant ivc, pehini a voe renovacion vœu ar vadiaut. Netra a douchantoc'h : dresset e voe un oter e traon an Iliz, elevet var un theatr. Douguet e voe ar Zoramant, epad ma voa ut bêleg er gadorzerion, oc'h ober un discours eus an touchanta, ha calz convenabl d'ar ceremoni zantel-ze.

E fin ar sermon, an Otrou Moriç, Superior eus ar Mission, a interpellas an oli assistantet, hac à renouvelas en o fresanç ar pez hon eus oll prometet en hor badiant.

An II eus ar memes miz Gouere ez eo bet grêt Clotur ar Mission dre ur procession ar gaera.

An Otrou Nayrod, Person a Blestin, a zo bet o raneontr daouzez procession, pere a deue da ogmanti solemnite ar gouel.

Goude ar gousperou, an Tad Moriç en em laqas da zermien ebars en Iliz ; an Otrou Lhostis, Person a Bloumilliau, pignet var un theatr, a zermone er vêred vis-a-vis da benn an Iliz ; an Otrou Abherve-Gueguen, Person a Blouyan, a zermone var sichen ar Groas a zo

etal antre principal ar vêred ; hac an Otron Dollo, Person a Loc-Miguel, a zermone ive var un theatr savet etal ar Groas Mission ; ur bobl immanç o zelaouë gant un attacion ar vrasa.

Ar zermoniou achuet, e voar-retornet d'an Iliz, a belec'h eo sortiet ar procession evit disqen ar su a vord traou ar vêred, hac ez eo bet êt da Dachen' an Hospital, elec'h ma voa savet un orator supêrbi evit ar Zeramant.

Caera spectacl e voa guelet eno trizec Croas demeus ar barosiou divâdro. un nombr bras a vêleyen, an dud yaouanq dindan an armou ur boblimamnç meurbet o heuill ar Procession ! Oll, eus a fonç o c'halon, e canent melodïou d'or Zalverz adorabl.

Eus an Dachen' e tisirôas ar procession da gaoutar Groas Mission, e troad peini e voa ive grêt un orator ar gaera ; hac e pelec'h, aroc rîy ar venediction, zo bet dêvet leoriou difennet.

Goude eo bet retornet ar procession d'an Iliz, e pelec'h ez eo bet terminet ar ceremoni quer touchânt-ze dre venediction ar Zeramant.

F I N.

